

## KIS-809 – Notennoù gramadegel XII – An destieroù – 1. An hogozennoù

(GE – 31 01 04)

*Destiañ* a ginnigan envel nep strishaat eus an ergeñveriñ<sup>1</sup>. Pa lavaran : *aval*, ez ergeñveran ouzh kement AVAL a zo, a voe, a vo, a c’haller derc’h-ennañ, h.a. Mar lavaran : *an aval-mañ*, emañ strishaet an ergeñveriñ ouzh an AVAL a ziskouezan. Destiet ’m eus va ambredañ ouzh un ergeñverenn bevennet he erdal ; alese, *destier* a ran eus araez an destiañ ez eo *an ... -mañ*. An diskouezelloù a renker enta e-touez an destieroù. Renkadoù all ez eus : arveret e vez evel destieroù an adanvioù, an adanvennoù, klokaennoù ar pennanv, ar gerioù mell, an hennerioù, ar gougevrederioù<sup>2</sup>, an niverelloù, ar perc’hennelloù, h.a.

En notenn-mañ e pledin gant arver an adanvioù evel destieroù.

### **DAOU VOD AN DESTIAÑ : DRE EZKAELAÑ, DRE ANLOUERAÑ<sup>3</sup>**

An adanv a strisha ergeñveriñ ar pennanv emañ outañ evel hogozenn dre zaou vod : dre ezkaelañ (e maezienn an erdal, diwar-bouez daveadoù), dre anlouerañ (e maezienn an ental, diwar-bouez enlenadoù<sup>4</sup>) :

— Strishadur dre ezkaelañ : er c’herienn *sifroù arab*, ez eo strishaet erdal ar pennanv *sifroù* a-zave kevenep d’ar *sifroù roman*.

— Strishadur dre anlouerañ ; o tigeriñ ar skourrva ez estlamman : *ar sae wenn !* Al liv *gwenn* a verzhan ennañ e unan, a anloueran, evel enlenat d’ar

---

<sup>1</sup> Sl. KIS-343 – Gl. **référent, référence**, La-08, pp. 327-332.

<sup>2</sup> Sl. La-15, p. 160.

<sup>3</sup> Sl. La-14, p. 125.

<sup>4</sup> Sl. La-05, pp. 69-70.

*sae* ha war un dro ez anloueran, ouzhpenn talvoudoù argelel al liv gwenn, eñvorennoù stag ouzh ar sae, h.a.

Merkomp diouzhtu e vez darempredoù kenglokaat etre an ergeñveriñ dre ezkaelañ hag an ergeñveriñ dre anlouerañ. An hogozenn *gwenn*, hep paouez a berzhiañ en anlouerañ, a c'hell talvout ivez da ezkaelañ ar saeoù a livioù all a zo er skourrva. Ouzh kemm, er c'herienn *ar Re Zu*, e c'hell an hogozenn *du*, ha hi o talvout d'ar strishaat dre ezkaelañ, dec'heriañ ouzhpenn se anloueradoù karget a lorc'h (*black is beautiful !*) pe a zismeg hevelebour.

Merkomp ivez ez eus e brezhoneg un harz ouzh ar c'henglokaat emaoomp o paouez stadañ, eleze ouzh tredizh an eil gant egile a 'n daou zurc'hadur eus arver an hogozennoù : ar vezañs eo eus div steudad adanvioù o talvout a-getep da zestiañ dre ezkaelañ ha da zestiañ dre anlouerañ — mar adkemeromp ar skouerioù roet e KIS-093<sup>5</sup> : *korfadurezh denel* (a-gevenep d'ar gorfadurezh *loenel*) ; *sell denek* (a anlouerer ennañ doareoù buhezal piaouel da vab den).

#### **RENKADUR AN HOGOZENNOÙ HERVEZ MOD AN DESTIAÑ**

O vezañ ma c'hell adanvioù 'zo bezañ arveret tro ha tro evel destieroù dre ezkaelañ ha destieroù dre anlouerañ, en o renker dre an arver a reer anezho, eleze amañ e kement ha hogozennoù — pennaenn c'hramadegel houmañ a ranker heuliañ pa studier yezhoù evel ar brezhoneg, enno un trec'houllo bras etre ar furmoù hag an arverioù<sup>6</sup>. Daou arver pennañ a reer enta eus an hogozennoù :

— Evel destier dre ezkaelañ, a c'hallfed envel ivez *destier ezkaeladel*, *destier daveadel*, pe ent krennoc'h : *destier rummañ*, *rummer*.

Pa renker dilhad er skourrva, kuit a nep kantaezad, e saveler rummoù : saeoù hir, saeoù berr, saeoù goañv, saeoù hañv, h.a. An hogozennoù *hir*, *berr*, *goañv*, *hañv* zo destieroù rummañ, rummerioù. Diwar vont, merkomp arver ar pennanvioù evel hogozennoù.

<sup>5</sup> Sl. La-05, pp. 69-70.

<sup>6</sup> Kentradet e voe ar bennaenn-se da geñver dezrann ar verb, sl. SADED, Yad-0, La-01, pp. 75-94 ; DOBB. pp. 9-17.

— Evel destier dre anlouerañ, a c'hallfed envel ivez *destier anloueradel*, *destier enlenadel*, pe ent krennoc'h : *destier doareañ*, *doareer*.